

Na da Sant coz na nevez      Birviquen na daze  
 En ur c'har neuze e pignas      Vit mont da charret,  
 Ha teir gueich ec'heilpennas :      Songeal a ra an ingrat  
 En deus Doue offanfet,      Offanfet ar Santes,  
 Truez bras voa e glevet      O c'houlen e vues.  
 Teir gueich guech e tremen dreistan,      Or c'has  
    houarnet mat,  
 Maro e tleye bezàn      Hep sicour or Vam mat :  
 Diou goulaouen a bresant      En deveus digacet,  
 Evit paea an amant      Da veza blasphemet,  
 Lart a zes en ur voelàn, *bis*, Na dleye e vues  
 Nemet da Santes Anna      E vir Advocades.  
 A Barres Duault ur Vroec      A gollas ar guelec,  
 O vezàn bet dispriget      Imaich ar Radennec :  
 En tronos voe digacet,      Dar Radennec arre,  
 Eno he deus recevet      Ar guelt dirac Doue,  
 A veljac'h a Bothoa      Daou vuguel en dour-coet,  
 Gant o Mamou dre anqua      E voant abandonet,  
 Da Santes Anna goestlet      E favont var an dour,  
 En ur grial, diredet      Ha dent prom d'or fitour.  
 Ur buguel tri bloas oaget,      Camet n'en devoa gret,  
 Evel ma voe bet goestlet,      D'e Vam e ze reder :  
 Quememâ so arruet      E Parres Plusquellee :  
 Ar c'hrouadur a so bet      En vœu e Radennec,  
 Un Ozac'h a Gouelin      Gant un trançh affom-  
    met,  
 E vroec oc'h ont dan daoulin      En deussan bet goestlet :  
 E varo voa annoncet,      Dont a ra en bues,  
 Ur scoet er bloas prometet      En deus bet dar Santes,  
 Ur vroec eus a Plonevez      Bouzar hac ampechet,  
 Goestlet e deus ar c'herfet      Hac ivezar c'hlevet :  
 Ha c'hui Annaic ar Quere      A Dreo Lancaou,  
 Pa voac'h bet goestlet eno,      Dan oll e yoac'h maro.  
 Ur plac'h eus a Vontroulles      Gant bar a voe scoet,  
 Pad seiz vloas ar baoures ques      Camet ne devoa gret,  
 Dar Radennec digacet,      Eno e voa goestlet,  
 Hac eno e deus caver      Remet oc'h e glêvez.

4

Var e zaoulin prosternet      Dirac Santes Anna,  
 E Zad e deveus pedet,      Pedet en or voela :  
 Roet d'am merc'h ar c'herfet,      O Advocades quer!  
 Evit gloar Doue groet      Ma querzo han dar guer,  
     Diefel a ra neuse      Ar plac'h he branellou,  
 Commanç a ra da vale      En dro dar Feuntenyou,  
 Da atesti ar burzut      En Templ ar Radennec,  
 Dirac daoulagat ar dut      Ema'r bisier-loayec.  
     Fanch Gremant er bloas prefant      En ur punç dis-  
     quennet,

E velchaden en instant      Da vezàn affommet,  
 Varneàn ar vassiage      Goug ar punç a gouezas,  
 Dar Santes e voa goestlet,      Hac hi er c'honstervas.  
     E voniet hac e rochet      Gant ar vein defroefet,  
 E oll memprou conservet,      Divleff ha yac'h meurbet,  
 A brouf dan dut incridur      Pouvoar Santes Anna,  
 Rac ne ra quer an natur      Euvrou vel ar re-mâ.  
     Ur plac'h eus a Lannion,      Cam epad pevar bloas,  
 A zeu a greis e galon      Dar Chapel var diou vas,  
 E biziér a lez eno,      Querzat a ra dar guer,  
 En ur meuli hon Autro,      Ha mam goz hor Salver.  
     Ur Miracl e'hoaz arruet,      Reit oc'h attantion,  
 Oc'h e gavel voe crouguet      Ur buguel, o eston !  
 Crouguet pad un hanter-heur      E chommas er stâd-  
     se,

Christenien, pebes malheur,      C'hoarveout quemense !  
 E Vam baour pa antreas,      A chommas estlamet,  
 E crouadur pa velas      Oc'h e gavel mouget ;  
 Da Santes Anna er goestlas,      Ha dre e vadeles  
 Hi sur er resuscitas,      E faveur e Vam guez.  
     A vis Eost er Sul quenta,      En devez ar Pardon,  
 Ur Plac'hic eus a c'huec'h vloa      So gant devotion  
 Dar Radennec digacet      Var diou fals'hic harper,  
 Eno e deus o lefet,      Dar guer e deus querzet.  
     Herve declaration bis,      Ne doa baleet biscoas,  
 En dro ar Brocession      En deiz-se e valeas.  
     Ur plac'h eus a Dreduder,      Mari Michel hanvet,

A divrac'h goulet donder	En ur punç voa coet,
Goude pedir heur amser,	Et da voelet an dour,
E savas pront ha liger,	En ur goulén sicour.
Santes Anna, emezi,	Ho pèt ouzin truez;
Mar deut d'am abandoni,	Coller eo va buez,
Dar Radennec me yelo	En devez ho Pardon,
Ho crandeur me publico	En tro'r Procession.
Bet en e Chapel neve bis,	En ur voelàn douree;
E deus commeret conge	Deus Templ ar Radennec.
Eur vrac eus ar Radennec	A goueze en drouc-
fant,	
Lieffoc'h evit bemde,	Siouaz, pebez tourmant!
Er Radennec gant guir fei	Eo bet en em voestlet;
Aboue, herve testeni,	Ne goes e drouc ebet.
Tri den a gouelet Leon,	Hac un oac'h a Gastel,
So deut gant devotion	Da visita'r Chapel,
Gant rem en o isili	E voant oll tourmantet,
Guelleet eo bet dezi,	O falc'hou o deus lelet.
Anna Quervin surprenet	Evel dre accident,
Coller e devoa ar guelet	Hac ivez ar parlant,
Prest da veza sebelyet,	E zut oll e goestlas,
Ractal e deus parlatet,	Ractal e pareas.
Ut tan goal en ur guer vras	En Parris Pontmeive,
An oll en quer a spontas,	Ha goull sicour Doue:
Dreizoc'h, ô Santes Anna!	Ezint bet preservet,
Deoc'h oc'h en em voestla,	An tan so bet motguet.
C'hui epquen Elez Doue,	A ouffe lavaret
Pet bursut a-ra bemde	Jesus er Radennec,
Pet troublet o Iperejou	So bet tranquiliset,
Ha pèt oc'h o c'hlevejou	O deus eavet remet!
Guelet maro ho Prélat,	Pebez coll, Quernevis!
Pedet oll evit ho Tat,	Ar Prinç eus hoc'h Ilis:
Eon en devoa ordrenet	Batissa ar Chapel,
Enni en deus approuvet.	Ar Vreuries Carmel.
Goude ma ze bet scrivet	Dar Pab hon Tan Sante!
Ar Miraclou approuvet	A so gret er Chapel,
An Indulgeançou Plenier	En deveus accorder.

Dan dot eus a bep carter	Oll guir penitantes
* A vis Eoff ar Sul queata,	Clevit, Pelerinet,
Ma Pardon Santes Anna,	Chapel ar Radennec,
Deut neuse d'e bistra	Cant guir devotion,
Coes ha communia,	Hac o pezo Pardon.
End ezeus ur sourecen	Cant an Ee binniguet,
Hac a ro da bep Christen	Remed oc'h e glenvet
Ha piou a vo estonet	Demeus a guemoma,
Enni e zebet caver	Imaich Santes Anna.
An Imaich miraculus	Enni vezàn cuzet.
N'eus e rentet vertuzus	Enep pep fort clenvet;
Rac-se eta, Bretonet,	Deut oll a bep canton;
Vel ma vezit affliget,	Dy gant devotion.
Ho taoulagat distroct,	Itron Santes Anna
Var an dut affliget	A vistro ar plac-mâ :
Roit ho penediction	Dar Pelerinet var
A zeul d'ho Pardon,	Ha da Bardon Bulat.
D'o Person, d'o Fabligen,	Roit ivez ho pennos,
Emaint pemp bloaz so soudèn	N'o servich deiz ha nos.
Ha din-me ha d'o Public,	Reit nerz, Santes Anna,
Me'r promet bete'r maro	Na cessin d'o cana.

F I N.

(Cantique à Ste Anne de RADENNEC)  
non mentionné dans Ollivier